

26

# DA VEMOR

## An Autrou'n Abat a LANSALUT,

Chaloni eus a His a Itron Varia ar Vur a Montroulez,  
eus a Meaux hac a Guemper.

### PERSON GARLAN:

Maro e Montroulez, an 19 eus a vis Mae 1846, hac antéret an deiz  
varlerc'h en Garlan, da bemp heur eus an nós.



O devez a c'hlac'har ! ne velomp tro-wardro  
Nemet tristidiguez var bisach tud ar vro....  
An Abat LANSALUT, qen caret gant an oll,  
Allas ! ô va Doue, a râncomp dont da goll !  
Na glêver, var ar menez hac en qer, nep seurt brut  
Nemet : Maro eo-ta an Abat LANSALUT !....

Peguer bras niver tud, diredet a bep tu,  
Vardro Sant-Malani, pen-da-ben dre ar ru,  
A voa en em gavet da vesca o feden  
Gant ar c'hân a varo-demeus ar velleven !  
Eun dever just e voa dont eno da bedi  
Evit eun den qer mad, qeuziet a bep-hini.

— 2 —

Pa bartias ar c'horf evit mont da C'harlan ,  
 E voe heuillet gant calz a vignonet dezan ,  
 Pere n'er c'huitajont , oll carguet a c'hlaç'har ,  
 Qen a voe e gorf paour disqennet en douar .  
 Harp d'an autrou David eo laqet da repos ;  
 O eneou a zo en joa ar barados .  
 En em garout a rent evel daou güir vignon ;  
 Eur vadelez meurbet a voa en o c'halon .  
 Dorn Doue en devoa e gunduet dezàn ;  
 Madelez an Abat a voa bras evitàn .  
 Goude beza santet trubuillou eus ar bed ,  
 Evel eun hilloen e voa en em staguet  
 Ouz an den generus , pini n'en d'oa qen c'hoant  
 Nemet da glasq bepret dont d'en renta contant .  
 Gante o daou e meus bet alies comzet ;  
 Va c'halon a zanten em c'hreiz joaüs meurbet  
 Pa deuen da zelaou an eil hac eguille ,  
 Hac o velet penaus voa bras o c'harante .

Er güelet hon eus oll , n'eus fors dre bez amzer ,  
 O tont gant eur soign vras da gövessât en qër :  
 Nac ar brassa tomder , nac ar yenien vras  
 Na eljont en ampech , daoust d'e oll boan , sivoas :  
 Peur-goutanti an oll a voa e c'hoant vrasa ,  
 En despit d'e scuisder , alies ar goassa .

Pelec'h cavout eun den qer mad , qen generus ,  
 Dignoc'h eus ar garg caer a Vinistr da Jesus ?  
 E blijadur vrasa , c'houi er goar , christenien ,  
 A voa , en peb amzer , ober vad d'ar beorien .  
 Na pebes niver tud , en o c'hövession ,  
 A recevas outàn peb consolation !



— 3 —

Garlanis maleürus! c'houi a goll eur güir dad;  
Mes ni ive, allas! a goll eur mignon mad.

Daou vloas ha trégont zo ho poa-én da Bastor:  
Ha c'houi oc'h eus biscoas güelet etal e zor  
Ar paour qèz ezonmec, hep beza soulajet  
Gant an den venerabl a ràncomp divoeret?  
Atao o receve eguis e vugale,  
Hac o rente contant ha joaüs hep dale.  
E fèçon d'o receo, qer franc ha qer laouen,  
A laqe anêze d'ancouât o anqen.

Ma vije nep sourci etouez tud e barres,  
E cavet en Abat güir guelennadurez,  
Ha contant da zonet da zenti d'e gomzou,  
En em gavent eürus da heuill e guzulliou.  
Mar tigüeje unan e zanvad dianqet,  
Eguis eur pastor mad e rede d'e gavet,  
Hac e comze outàn gant qer bras madelez,  
M'en em rente souden da eur seurt carantez.  
Biscoas den, a gredàn, goude en darempret,  
Na ellas qet mancout da zonet d'e garet.

Ne gredàn qet beza biqen dislavaret,  
O credi e vezo meurbet dies cavet  
Eur Pastor qen carus eguetàn birviqen:  
Graç déc'h, Garlanis qer, d'er possedi souden.

Unanet oll hirio en e servich eiz de,  
Demp brêmâ d'an daoulin da bedi var e ve;  
Trugarecomp Doue, rentomp dezàn enor  
D'er beza bet qeit all evit hor güir Pastor,

Ha pedomp hor C'hrouer ma zayo da repos  
Etouez an oll aeles en gloar ar Barados.

Miromp en hor c'halon memor an Abat qer ;  
Ra vo presant demp oll atao en peb amzer ;  
Memor eur Pastor mad zo qer da bep christen ;  
En Abat LANSALUT hor bo sonch da vigen.

**EUR MIGNON CÔS D'AN AUTROÛ'N ABAT.**

Ma vije nep sonch etouez an d'ar  
E caver en Abat g'ar  
Ha c'halon da sonch da vije  
Ha en g'ar da sonch da vije  
E peb eur pastor mad e vije  
Ha e c'halon g'ar da vije  
Ma en c'halon da sonch da vije  
Bisous da , a g'ar , g'ar  
No ellas da sonch da vije  
No g'ar da sonch da vije  
O c'halon e vije da sonch  
Ha eur pastor da sonch da vije  
G'ar da sonch da vije  
L'ant oll da sonch da vije  
L'ant da sonch da vije

---

E Montroulez, eus a Imprimeri LÉDAN.